

TE DEUM

Peursavet gant Niketas (+ goude 414) eskob  
Remesiana (Bela Palanka, Serbia), mignon da  
bPaulinus Nola, (hervez Buhezskrid sant Luner,  
+ 580).

C'hwi, Doue, a veulemp, / c'hwi a embannomp da Aotrou. // C'hwi a ze an  
Tad peurbad / doujet dre an douar a-bezh. // Deoc'h-c'hwi an hell  
Aeled, / deoc'h-c'hwi Galloudoù an neñvoù hag an holl vadoù. //

Deoc'h-c'hwi Keroubim ha Serafim / dibaouez a-unvouezh ez embannont:  
Santel // Santel // San- tel an Aotrou Doue, mestr ar bed !!! Leun emañ  
an neñvoù hag an douar / diwar an holl veurder eus ho klear. //

Deoc'h, strellad kledus / an Ebestel a-gevret, // Deoc'h, bagad illur /  
kement a Brofeded. // Deoc'h ar Verzherien gwennwisket / a gas holl  
en ur ser. // Tro-war-dre d'ar voullzouar / ez embann an Iliz he fe  
ennoc'h. // Tad / dreist pep gofvor e veurded !!! Dellezek ivez a  
zoujañs / ho kwir Vab nemetañ. // Santel ivez / ar Spered gwarezer. //

C'hwi, toue ar c'hleor, Jezuz Krist. // Eus an Tad / a-viskeazh da  
virviken, Mab. // C'hwi, e-sell da lakaat Mab-den en-dre en e rez, /  
ne heugjoc'h ket o choa e korf ur werc'hez. // C'hwi, bet trec'h

da vat war ar maro kriz, / c'hwi a zigoras d'ar grederien riez an  
neñvoù. // C'hwi a sez e tu dehou Doue, / tre e-barsh glear an Tad. //

Barner a greder emañ <sup>oc'h</sup> tonet. // C'hwi eta, ni he peñ, skeazellit ho  
servijerien, / ar re hoc'h eus dasprenet gant ho kwad a briz. //

Da viken grit / ma vezint e-touez he sent e gloar ar baradoz. // ---  
--- SALVIT ar bobl a zo deoc'h, Aotrou Doue, / gwennvidikait ar re a  
zo hoc'h hêrzh. // Ha renit warno, / ha dougit anezhe betek ar bed  
peurbad. // Deoc'h-c'hwi, Aotrou, bemdez / e kanomp meuleuzi. // Ha kanañ  
a reomp hoc'h ano er bed-mañ, / a gantvedoù da gantvedoù. // Ho teurve-  
zet, Aotrou, 'hed an devezh-mañ, / hon gwarezif diouzh ar pec'hed. //

Ho pezet truez ouzhimp, Aotrou, / ouzhimp ho pet truez. // Ra vezo skuilh  
lhet trugarez ho kalon, Aotrou, warnomp holl, / kement ha m'emañ hon  
goanag ennoc'h !!! Ennoc'h, Aotrou, em eus bet fiziañs; / ne vin ket  
ker-se-et da viken. //